

TORRET GAND KARANTEZ

Komzou : Job an Irien

Muzik : Mikael Skouarneg.

D : Tor-ret gand ka-ran-tez, ran-net 'vid or ye-hed C'hwi Je-zuz

eo ba-ra ar vu-hez Ma-ga-du-rez Dou-e e-vid eur bed

ne-vez, C'hwi Je-zuz ro-it deom ho Spe-red !

1- Ro-et 'peus hoh am-zer 'vid an dud kêz ar re i-zel

C'hwi Je-zuz an ha-der a gar peb den ha peb bu-gel.

2- Rannet 'peus ho komzou
Etre an oll, gand madelez,
Hadet 'peus levenez
'Leh dismegañs ha gwall-gomzou.

3- Roet 'peus ho fiziañs
D'an dud kollet, d'ar re wasket,
Hadet 'peus esperañs
Eur bed a beoh, eur bed salvet.

4- Roet 'peus ho puhez
Evidom oll, evid peb den;
Hadet 'peus trugarez
En or halon, evid bemdez !

*Ref : Rompu avec amour, partagé pour notre santé,
Toi Jésus tu es le pain de la vie,
Nourriture de Dieu pour un monde nouveau.*

1- *Tu as donné ton temps pour les auvres, les petits,
Toi Jésus le semeur qui aime chaque homme et chaque enfir*

2- *Tu as partagé tes paroles entre tous avec bonté,
Tu as semé la joie au lieu du mépris et des paroles dures.*

3- *Tu as donné confiance aux perdus, aux opprimés,
Tu as semé l'espérance d'un monde de paix, d'un monde sau*

4- *Tu as donné ta vie pour nous tous, pour chacun,
Tu as semé la gratitude dans notre coeur pour chaque jour.*